

8 - GOUSPEROU Vêpres

Sant Yann ma mab, klevet a rit ?

A-benn pegeit devezh amañ eho eured ?

A-benn digwener pemp sizhun

Ma mamm, klevet a rit ?

C'hwi soñje deoc'h vije bet ' benn warc'hoazh

Mes ne na vo ket

Dre belec'h afoc'h c'hwi d'ar bourc en deiz ho eured ?

Oh dre an hent bras penn da benn

C'hwi soñje deoc'h vijen aet dreist ar girzhier

Mes ne na rin ket

Kapal oc'h da lavar da biv e vefec'h c'hwi dimezet ?

Da verc'h paourañ den ' zo er bed-mañ

C'hwi soñje deoc'h e vijen bet dimezet da verc'h ar
markiz

Pet a vugale ho po c'hwi gant ho kwreg goude ho eured

Oh ! nav ha tregont

C'hwi soñje deoc'h vijen bet ur penn avel sot

Petra rofec'h da evañ d'ho tud en noz ho eured

Oh ! staot ar wiz kozh

C'hwi soñje deoc'h vije bet gwin gwenn ha gwin ruz

Petra rofec'h da zibriñ d'ho tud en deiz ho eured ?

Depouilhòu laou ha stripoù c'hwen

C'hwi soñje deoc'h vije bet bara gwinizh ha uioù fritet

Saint Jean mon fils, entendez-vous ?

Dans combien de jours votre mariage a-t-il lieu ?

Le vendredi dans cinq semaines

Ma mère, entendez-vous ?

Vous pensiez que c'était demain

Mais cela ne sera pas

Par où irez-vous au bourg le jour de vos noces ?

Par la grand-route tout du long

Vous pensiez que j'aurais sauté par dessus les haies

Mais je ne le ferai pas

Pouvez-vous dire avec qui vous vous mariez ?

Avec la fille de l'homme le plus pauvre de ce monde

Vous pensiez que c'était avec la fille du marquis

Combien d'enfants aurez-vous avec votre femme ?

Oh ! Trente neuf

Vous pensiez que je n'aurais qu'un idiot

Qu'offrirez-vous à boire à vos parents à votre mariage ?

La pisse de la vieille truie

Vous pensiez que ce serait du vin blanc et du vin rouge

Que donnerez-vous à manger aux gens du mariage ?

Des dépouilles de poux et des tripes de puces

*Vous pensiez que ce serait du pain de froment et des
cœufs frits*

Pelech e lakaoc'h c'hwï ho kwreg da gousket e noz ho eured
 E kraou ar porc'hell a vo lazhet
 C'hwï soñje deoc'h e vije lakaet honnezh e-barzh gweleoù
 pluñv

*Ôù ferez-vous coucher votre femme la nuit de vos nocés ?
 Dans la crèche du cochon que l'on va tuer
 Vous pensiez qu'elle serait couchée dans un lit de plume*

Dre belech'e komañsoc'h c'hwï gant ho kwreg e noz ho eured ?

Par où commencerez-vous à entreprendre votre femme la nuit de vos nocés ?

Oh ! Dre an tamm kreiz
 C'hwï soñje deoc'h vijen komañset gant he bizied treid
 Mes ne na rin ket

*Oh ! Par le milieu
 Vous pensiez que j'aurais commencé par ses doigts de
 pieds*

Mais je ne le ferai pas

Gloria patrio es filii sancto

Fañch Périou a entendu chanter cette chanson à la fin des battages en 1936-1937 par Jean Le Scanf de Plougras.



Fañch Périou